

93
708

RECIT

COMPOSET A NEVEZ

VOAR EUR C'HRIM COMMETET

gant potret *an Herec,*

JUGET D'AR MARO EN 13 A VIS EBREL 1840.



Otro Sant Jacq'es, patron a barrous Loquirec,
 Diganech a c'houlennan sclerigen d'am speret,
 Evit gallout recitan eur c'hrim q'en detestabl,
 Pehini so bet commetet gant daou den miserabl.
 Me o ped, assistantet demeus a Finister,
 Da chilaou eur jujamant a so bet en Q'emper,
 Ebars ar bla daou-uguent, an drizec a ebrel,
 Voar eur c'hrim q'en execrabl hac un torfet cruel,
 Implian a rin ma speret da dont da recitan;
 Q'ement christen badeet a glevo q'ement-ma
 A greno o c'halono hac o oll izili
 O clevet ober recit demeus an daou den impi.
 An drizec a vis here, er bla nao a tregont,
 A song an den ancien mont da brenan ar font
 Demeus ar plas ma voant o chom, en parrous Loquirec,
 En bilagen Lezengar, Roz-ar-poul eo hanvet.

(2)

Pa neus closet e arc'hant a hes da n'eum vouiscan,
 Hac a voa an daou valurus o c'hortos anean;
 D'en skein vit en assomin pa vije daou-bleguet,
 Ma chomje an arc'hant gante da vean partaget.

Pa voa daou-bleguet ho zad da brenan e voto,
 En scojont d'en assomin dre un nombr a dolio,
 Ha pa gueas dan douar, gant eur men bilien,
 Herve a meus entetet, o deus friqet e ben.

Ha gant eur morzol houarn e torront e vempro,
 E ziou vrec'h, e ziou vorzet hac e ziou voarigo.
 Biscoas den na neus clevet eur c'hrim evel heman
 Deus ar rum a zo breman o ren voar ar bed-man.

Goude terrin e vempro an daou den miserabl,
 Hep cavet compassion a crogjont en o zad,
 Hac en toljont drec un arc'h da c'hortos ma teuge
 An noz evit en transport eur pennat ac'hane.

Entre dec hac unnec heur o deveus prepalet
 Eur loen evit en zaman ma vije transportet;
 Ha pa gregont er c'horf paour na voant q'et evitan
 Hac o deus forcet ho c'hoar da zicour en zaman.

O Doue! pebes glac'har ha goassan calonat,
 E defoe ar plac'h yaouanc o creguin en e zad;
 Rac na voa q'et voar ar lec'h pa voa gret an torfet
 Q'en a voa mont d'en zaman ne defoa q'et clevet.

Partiet int ac'hane dre urs an drouc speret,
 Pehini voa eus o zicour da ober o zorfet;
 D'e gas en eur plac distro deus an dremenidi
 Voar vord eur poul en toljont eur pennad deus o zi.

Retorn a reont d'ar guer an daou den miliguet,
 Da guemeret o repos goude fin o zorfet;
 Joaus bras ha disourci pa na voa test abed
 Nemerd an drouc sperejou, ha n'ho discuiljent q'et.

(3)

94
 109

Sonjal a rent na vije biq'en disoloet
Ar c'hrim enorm hac euzus o deveus cometet ;
E veojent en o flijadur bete fin o bue,
Da roulan gant an arc'hant pa voant chomet gante.
Daou den o vont d'an oferen, eur zul voar ar beure,
A rancontras ar c'horf paour en hent en e hourve,
Hac o deus avertisset tud deus ar villajen
Da donet d'en assistan ebars en ber dermen.
Unan e amezeyen a deu d'en bizitan,
Hac a laras franchamant e hanefo anean.
An Herec eo heman hac a zo bet lazet :
Gant an amzer a vezo ar c'hrim disoloet.
Pa neo bet anavezet et ze bet digasset
E gorf paour da interrin dan douar biniguet ;
Er verret a Loquirec a medi o repos ,
Graç d'e ine da vezan en gloar ar barados.
Dre bermission Doue eo bet disoloet
Ho c'hrim a voa re boner, hac int anavezet,
Q'emeret ha conduet en guis daou griminal
Da vont da interrojin betec an tribunal.
Ha pa zeo bet finisset ho declaration
Int condaonet d'an ouarn ha laqet er prison
Da c'hortos o jujamant dre un nombr a desto
Pere a zo bet q'iriec d'o c'hondamn d'ar maro.
A un test a daou-uguent a zo interroget
En tribunal en Q'emper, voar ar memes sujet,
A lerent oll en eur voes ho c'hondaon d'ar maro
Pe e c'herrije goude un nombr a valeurio.
Evel ma int condaonet e lennet o zetanc
Dirac an assistantet a voa en odianç ;
Hac an daou den miserabl ne rent etat ebet
O clevet annonç e oant d'ar maro condaonet.

(4)

Jesus a n'eus pardonet e vrassan bourrevien,
 Goude mervel en eur groas evidomp, pec'herien:
 Pa int bet gonvertisset arog soufr ar maro
 O defo digant Doue o lod deus ar joayo.

Peb a velec o devoa da rei instruccion,
 Da lacat en ho speret goul ous Doue pardon:
 Ar c'henta an autrou Lucas hac an autrou Nessian
 E oa ous ho assista bete an heur divean.

Er pempet de varnuguent deus a vis gouere,
 Dirac un immanç a bobl, voar ar pave neve
 E c'hint bet ispidiet vit mizilour patant,
 Exempl d'an dud ancien couls ha d'ar re yaouanc.

Habitantet Montroulez, noblanç ha bourc'hijen,
 M'ho ped assambles guene da laret ur beden
 En dilivranç d'ho ene, ma voent recevet
 Gant Jesus hac ar Verc'hes en ho evurusted.

De profundis.

An hini n'eus recitet un nombr a valeurio,
 O clevet comz aneze erruet en peb bro,
 Yan ar Goen e c'hano, c'hoec'h bla ha tri-uguent;
 En q'ait a ma vo lezet e valeo en end.

FIN.